

YF_0123_Chanson nevez

war sujet glac'har ha tristedigez daou zen yaouank dimeus a barrez Speied prest da vervel gant ran galon

Tud yaouank deus ma 'farrez, didosdit, me ho ped
Da zelaou ar vuhez a zo ganin erruet
Me a zo ur sergent-major, o tistrei deuz an arme
Rejouisset ma c'halon, oc'h antreal e-barz ar vro.

Pa oan-me partiet, da gomans va c'honje,
Am-boas laosket war ma lerc'h objet va c'harante
Am-boas laosket war ma lerc'h fleurenn ar yaouankiz,
Evit mont da ober eur c'hampagn, etrezek ar ger a Baris.

E-pad pevar bloaz hanter ez on bet e regiment,
En-eus graet va oll chagrin ha va brasan tourmant
Bep noz ha bep mintin, hag e-pad an deiz aliez,
Va speret a nije betek ti va mestrez.

Ma speret a nije betek va bro benniget,
O sonjal a beb moment e-barz va amzer paseet,
C'hoarvezout a rae ganin e-giz an durzunel,
Pa vez kollet ganti he 'far hag en em daol da vervel.

Ganin-me, tud yaouank, e oa c'hoarvezet memes tra
Glac'haret bras a oan o tont da partian.
Rannet e oa va c'halon o tonet d'he c'huitad,
Hi pa welas ac'hanon he-devoa kalonad.

Eiz devez a-raok partial vezemp assemblez bemdez,
Hag ur sulvez d'abardaez hi a lavaras din-me,
An daerou en he daoulagad, he mouez entrecoupet
Petra rin-me den yaouank, pa vioc'h-c'hwi partiet

Me ya da vont breman da ober pinijen,
Da lakaad livan e du va oll dilhajoù gwenn,
Evit ober kanv da va muian karet,
Partiet evit ar Republik en deizioù tremenet.

Pa vioc'h erru en ho rejimant, me ho ped 'ta, servicher
Da rein din ho kelou raktal dre ul lizer,
Me am-eus chagrin bras gant aon a vefec'h kaset,
En tu all d'ar mor bras e-giz d'ar vartoloded.

Ar bloavezh mil eizh kant tri ugent ha daouzek,
Da zevez gouel an Nedeleg a oan-me partiet.
Da zevez gouel an Nedeleg, da zeg eur deus an nozh
Pa oa ma c'hamaraded o c'honet da repos.

E oan o vont ti va mestrez, da laret dezhi kenavo.
Hi pa welas ac'hanon a gomansas gouelo
Arsa eta, den yaouank, emaoch o vont er-mez ar vro.
Beuzet ez eo ma c'halon en ur mor a zaerou.

Kenavo a laran deoc'h, kenavo va mestrez.
A-benn ar pevar pe pemp bloaz ni en em gavo asamblez
Hi a vouchas din neuze, he daoulagad en daerou.
Hag a gouezhas d'an douar kazi e-giz d'un den marv.

D'an deiz kentan ar bloaz, e oant erru e-barz ar ger a ruel,
Setu me a skrivas ul lizer d'am mestrezik fidel,
Hi a respontas din pevar devez goude,
Penaos e oa klanv, klanv bras war he gwele.

Mar na deuez ket d'am c'honsoli ma servijer fidel,
Gant ar chagrin, ar glac'har me zo prest da vervel
Ho pebeus malheur evit un den tener da gital e vro,
O welet e vuian karet e-barz toull dor ar marv.

Pa vezen en faction war ar menezioù uhel,
Ma daoulagad a droe war-zu Breizh-Izel,
Ma daoulagad a droe war-zu ti va mestrez,
Mes ne welen netra nemet koajou alies.

Deus ar mintin e kleven un nombr a lapoused
Ha mouezh ar rossignol, war bek ar wezenn pignet,
Ar rossignol a laras din dre e vouezh melodius
Te ac'h-eus e-bars ar ger ur vestrez karantesus.

Ur vestrez leun a c'hlac'har, a karget a anken.
Abae ez oc'h partiet, oc'h ober pinijen.
Ar rossignol a laras din dre ur vouezh triumphant
Me gred ez oc'h glac'haret, koulz a hi, soudard yaouank.

War da dal ez eo merket, gant liv an dristidigez,
Penaos ez out ankeniet, o kuitaat da vestrez.
Neuze e tiskennas d'an traon da vodik, da vodik,
Hag e teuas war ma skoaz, da ganan ar rnuzik.